

KANTIK ITRON VARIA GAVEL

DISKAN

Itron Varia ar C'havell  
Selaouit ho pugale,  
Hon diwallit, o mamm santel,  
Hon diwallit noz ha deiz.

1  
En e gavel ar bugelig  
A vez bihan a dister,  
C'houi hen nerzo dre eur sellig,  
C'houi en miro, Matam dener.

2  
Goude graet gantan eur c'hristen  
Gwir servijer da Zoue,  
Grit ma heuilho ar wir lezenn,  
Lezenn ar wir garantez.

3  
Mantret bras eo hon c'halonou  
O sonjal er brezel kriz  
A vez graet d'ar vugaligou  
Evit o harz da gredi.

4  
Da gredi o deus eun ene  
Da savetei er bed-man  
Hag a vo en eternite  
Gant Doue pe gant Satan.

5  
Deut d'hon sikour, Gwerc'hez Vari  
Ha n'hor bo aon ebet,  
Ha ni a zalc'ho d'ho pedi  
E heit ma vefomp er bed.

6  
Pa vo ar vugale tud vras,  
Ha dreist holl gwir gristenien,  
War an douar, war ar mor glas  
C'hellfont bale dianken.

7  
Rak c'houi bepred o diwallo  
Diouz pep droug ha pep pec'hed,  
Hag i bepred, i a garo  
Ano o mamm benniget.

8  
Ni fell dimp holl ho serviji,  
Ni tud waouank ha tud koz ;  
Ni fell dimp holl hoc'h enori,  
Ho meuli er Baradoz.

*Imprimatur, 12 genver 1905, A. Chalton, vikel vras.*

KANTIK AR VARTOLODED D'ITRON VARIA GAVEL

DISKAN

Itron vat ar Gavell  
Ni 'zo deoc'h bugale  
Gouarnit an avel  
Evidomp noz ha deiz.

1  
Ar mor a zo treitour,  
Zoken en e floura ;  
Pa vefomp war an dour  
Teurvezit hon nerza !

2  
Ar vrumenn hag ar skorn  
Zo dimp enebourien,  
Met astennit ho torn,  
Ha ni 'vo dianken.

3  
C'houi a zo galloudus  
Er bed-man, en nevou ;  
C'houi dre ho mab Jezuz  
Zo feunteun ar c'hrasou.

4  
Ennoc'h 'man hon fizians  
Er ger evel er maez ;  
Rak c'houi zo esperans  
Ar vartoloded gaez !

5  
Alies, Alies,  
Hen enzav a rankomp,  
Hon zeod 'vez dievez  
Ho pet truez ouzimp.

6  
Hon c'halon da viken,  
A zo hag a vo deoc'h !  
Mirit hi gwerc'h a grenn  
'N'hon c'hreiz, mar plij ganeoc'h

7  
Er ger hon bugale  
War barlenn o mammou  
'Gaso deoc'h, noz-veure,  
Pedenn 'vit o zadou.

8  
O selaouit Gwerc'hez  
Pa n'o dous ket pec'het ;  
Sellit gant madelez  
Ouz ar vartoloded.

*Imprimatur 12 a viz genver 1905, A. Chalton, Vikel vras.*

# Kantik an Islandeed hag ar Besketaerien

## DISKAN

Hon mamm dener,  
D'hon bag dister  
Roit sikour  
Enep d'an dour ;  
Stereden splann  
Ha Gwerc'hez c'hlan,  
Redit bepred  
'N Islandeed.

1  
Pa yud avel foll  
Pa groz mor diroll  
Diwa'it, Gwerc'hez,  
Ar pesketaer kaez.

2  
Bugel ec'h eo deoc'h,  
Er ger, e pep lec'h ;  
Er joa, en anken  
C'houi a bed hepken.

3  
E deod, alies,  
A vez dievez ;  
Met e galon vat  
Deoc'h a vo dalc'hmat.

4  
Ni zo deut pell pell  
Eus a Vreiz-Izel  
Da c'houit bara,  
Hep aon rak netra.

5  
Al labour 'zo start,  
A avel trubard  
Gwajou didruez  
'Lamm ouzimp bemdeiz.

6  
Hon zud en Arvor,  
Rouanez ar mor,  
Ho ped evidomp ;  
Bet truez ouzomp !

7  
Pa vo kemeret  
Awalc'h a besked,  
Ni, leun hon bagon,  
'Zistrou d'hon Bro.

8  
D'hon bro Breiz-Izel,  
A dreuz d'an avel,  
Yac'h ha dianken  
'N eur gana laouen.

*Imprimatur, 10 here 1901, Le Provost, Vikel vras.*

### *Ar geriou diaes*

Savetei - Sovetaat  
En e floura - En e gaera  
Gwerc'h - Pur, dibec'hed  
Glan - Fur  
Splann - Lugernuz  
Trubard - Treitour